



SAVET GANT AR JABADAO

a gan

Son Graesemad Pier

Diskan

- Graesemad, Pier, 'me galant, galant,
Graesemad, Pier, mar d'oc'h kountant.
1. Ketan'm boé choézet me hani (*bis*)
Oé er filaj en Normandi.
 2. Me oé 'it ha goulenez get hi ;
Plac'h iaouank, diméet oc'h hui ?
 3. D'in e reskont, el ur verh vad,
Marw é me mamm, marw e me zad ;
 4. Marw é me mamm, marw e me zad ;
Me zou minourez didan gward ;
 5. Na mar faut d'oc'h hui me c'haouet,
Na get me gward me goulenet !...
 6. Bonjour d'oc'h hui, tud en ti-man,
Kerklous d'er braz ha d'er bihan ;
 7. Ha d'oc'h hui bolom 'tal en tan ;
Men 'ma er vinourez tre-man ?
 8. Mar d'è er vinourez e klasket,
N'oc'h ket déit mad éit hi c'haouet ;
 9. Ema en hi c'hambre kousket ;
Ha hi a lar ne sawéi ket ;
 10. Ha hi a lar ne sawéi ket,
Ken e sonéi kloc'h en Dréinded ;
 11. Ken skoéi en heol 'ar en trezeu,
Ha huéléi laséin hi bouteu ;
 12. Ha huéléi laséin hi bouteu,
Ha displeg hi rubanenneu ;
 13. Eit mont en hanv d'er pardonieu
Ha de valardé d'er festeu.

— PEGEMENT A GOUST beza BREIZAD mad ?

— Pemp lur, en eur rei an hano an-unan da

KEVREDIGEZ BROADUZ BREIZ.